

Texte rédigé et lu par Joël LE JEUNE à l'occasion de

## L'HOMMAGE CIVIL RENDU À JEAN-BAPTISTE HENRY

le 5 août 2009

Lakaet da erruout, maro Jean-Baptiste 'zo degouezhet. Kuihaet en deus ac'hanonp da viken. Kaset en deus gantan lod deus hon envor, envor un avantur dispar, deuet da vezan lod deus Istor ar vretoned.

Jean-Baptiste a zo bet un deus artizaned pennan an trec'h a enep AMoko kaoz deus al lanv du dispar c'hoanvezet e Portsall e 1978.

En an hini eo hag a zob et gouest d'en em lakaod asamblez kumuniou Bro-Dreger renet gant Jean-Yves Simon, ha kumuniou Bro-Leon renet gant Alphonse Arzel.

En an hini eo hag en deus gounezet d'e du prezidant Departamant Aochou an Arvor, Charles Josselin, hag hini Penn-ar-Bed, evit sevel ur Sindikat krenv : sindikat kemmesk evit diwall ha miret Arvor Gwalarn Breizh.

En an hini eo hag en deus dizoloet ha harjet an hent evit prosezon dirak justis ar stadou unanet. Se oa ket bet graet jamez : kavout an avokaded gouest da zigenn ac'hanonp ; kavout pud gouiziek uvar dachenn ar guir met ivez evit chifran priz ar gwall graet d'han aochou ; kavout arc'hant evit mont a-benn d'ur prosezerezh koustus ha war varteze.

En an hini eo hag en deus displeget dimp hed-ha-hed daouzegbloaz ar prosez petra 'oa o paseal ha petra e oa ret d'ober. Kaset kuit en deus hon douetans, ha lakaet ac'hanomp da grelin en reizhded hor stourm.

Jean-Baptiste a oa an den en disgwel prosez an Amoco, met war un hu all, e oa hini a reie awen d'hor sindikat.

Na zisonjomp ket deus pezh en deus graet evit hor bro.

Trugarez dit, Jean-Baptiste, evit sklerijenn da spered

Trugarez evit da sevenadur lodet ganeomp

Trugarez evit da gret diharz

Trugarez bras Jean-Baptiste